

Temp hie war rügent haonde an eton da vevr!
Ha bees de denives dret na sehoenel na canel.
N'est a cog a lesen versé Goélois
E'p'hoent postel ar hog ruind na ha hoas da Paris.

AR VOTADEC

Ar votadec dilaer a ve consetet di-man
E'p'hoent cog ru ar Vourvoen, ha de n'hoell dret canel.

- Holla! holla! Goélois, me Jace Kiriñ!
- Ze Jaber dret na hog ru beñnes a cog vevr!
- Honnes en d'gean, ven tel arhant,
- Da! ma ve da d'hoent, ha de n'hoell dret canel.

AR DON

Appolon, Mercurius, Venus ha Jupiter



Ar votadec dilaer a ve consetet di-man
E'p'hoent cog ru ar Vourvoen, ha de n'hoell dret canel.

Trous so duman en Goélo ; arri ar votadec!
 Breman can cog ar Vourvoen, dre ar vro o rédec.
 « Coorico! melian; cocorik Goélois!
 « Deut hoas da vota-vit on ha me vévo discoutis.

Ar hog ru allas ! so paour en he glud alaouret.
 Ha gant pevion all ar vro n'eus quet da diouret.
 Casset-han da Paris du-ont er parlamant,
 E hallo hoas discoursi genid he dam arhant.

Pemp livr war nugen baonde an efou da veva!
Ha hoas ne deurves quet na scloucal, na cana.
Meur a gog a feson verso Goéolois
D'allout boéta ar hog mud, ma ha hoas da Paris.

Uguent la so man du-ont, méz am eus vit Goéolo!
Uguent la hep laret guir da difen hon droejo!
Ar-hégui dilavar a ve gouerset du-man:
Gouersomp cog ru ar Vourvoen, pa ne n'oull quet canan.

« Holla! holla! Goéolois, me Jaco Kiriti.
« Ne lahet quet ma hog ru, hennes a oar voti!
« Hennes en dro d'éean, var tol arhant,
« Dal ma ve da dioueret bars ar gouarnamant. »

Gouir a léres, Jacoéc, Armez a neus votet,
Votet hep tol guen eb et gant ar framasoned.
Eur framason, te oar, so traitour ha ha gaouiad
Hac a ra goab disous-it, pa ne gret he gujat.

Gouéhall, bars ar scolio, tisqué ar vugalé
Catéchis ha pedenno da nos ha da veuré.
Breman guir dious Doué er scol ne ve clevet!...
Hac ar lesen damnet se, Armez neus hi votet.

Gouéhall herve ar lésen a oa gret gant Doué,
N'efoa den ebars ar vro met eur vroeg en hué.
Breman pe diou pe daer hac ouспен mar cavet!
Hac ar lesen damnet se, Armez neus-hi votet.

Gant soudard ha martelod oa gouechall belein,
D'ho sicour da veva fur ha da vervel christen
N'eus quen ammonerien, ar lesen na noull quet.
Hac ar lesen damnet-se, Armez neus-hi votet.

Gouechall oa mad ar honvers, hac ar labourerien
Evit ho éd hac ho foan a gave goueneien.
Breman an estranjour a neus tout da honed !
Hac eleh difen he vro, Armez so bet tavet.

Gouéhall a sa honestis ébars an affero,
Breman ar paour so laeret ha cri pès a garo;
Laeron ar Panama so otrone hopred !
Hac eleh difen ar paour, Armez so bet tavet.

Ha frerien ha seuresed, quément den a laro.
So tud vel ar laïquet, tud ganet bars ar vro.
Breman deus ar scolio e hint bet argasset !
Hac eleh difen anè, Armez so bet tavet.

Goude se a laro hoas otro mair Plourivo :
Me e cog ar républic die oll en bro goélo !
Goers de gog d'ar broio-all, d'an Tunis, mar galles !
Evit-on me, coguéc mud, ne vin quen da bolès.

Re bell amser meus credet a va République
Eun dra vad evit ar paour hac an dud reuseudic.
Ne deus gret met crial : *vice la liberté* !
Pa he afféro ar Frans our fallaat baondé.

Eur République all a vou, honnes vou badéot
Ha mad d'ar labourerien vel d'ar marteloded
Honnes a vou honest, lesel rej liberté
Gant an oll, bian ha bras, da honid ho huc.

Ha breman, otro Armez, chommet da discouiss,
Evit an otro Joubert hon deus hoant da vota.
Heman a goseo mesc an députéed,
Hep coll he amser d'ober aic d'ar ministred.